

CHANSON NEVEZ

Composet voar sujet Disput en Eurejou.



Premier Couplet

Deize mad deoc'h tud an ty-man
Quer brao, quer koan ho cavan,
Quer brao guisket en peb feçon,
Ma lavar d'in, touche ma halons
Ne allin biquen tremen o ty
Hep donet d'ho saludy.

2° Couplet

Ni a zoug ar memeus salud
Deoc'h o hunan, kouls a d'ho tud
O honestis hag ho comsou
A blich meurbet d'hon halonou,
A lavar deomp so cher er guer-mâ,
Hag ho heuse ive quelou mad.

3° Couplet

Ni zo valerc'h eur goulmik ven
A zo goal dizet gant an tenn.
He askel glei a zo torret,
Nijal mui pell na ouffe quet.
Hac hon eus clevet lavaret
Hê er guer-mâ disquenet.

4° Couplet

Mar guê koulmet a houlenit.
It d'ar maner hac e cavit
Dre ar vro-ma, ganeomp-ni,
Neus nemet piquet ha brinic.
Hoguen eur gaou a lavarit,
Eun dra all eo a glasquit.

5° Couplet

Klash a ran eur boquet lozou fin,
Da laquat e barz em jardin
Eur louzouen mad deus ar bez,
Groed gant birou a garantez
Hac e clevis an diveza
E havouen voar er guer-mâ.

6° Couplet

Ar flourdilizen a glasquit,
Ziouas deomp a zo et kuit,
E man brema en Quimperle
Er gouant ho veuli Doue,
Koantoc'h evit eur boquet ros,
Demeus liors ar barados.

7° Couplet

Nan ma mignon, n'ho kredan quet,
Doue hen deveus ordrenet,
Evit ar vered an ivin,
Evit ar liors a louzou fin.
Hag ema da laouenat,
Kalonig eur pried mad.

8° Couplet

Evel ar gliz voar prajou,
E tired ive ho komsou.
Trugare ran tud an ty-man,
Evel ar mel voar an tam bara,
Da ober deus hon feurz kendirvi,
Den yaouanc antreet en ty.

9° Couplet

Ker buan en treizec ma bro,
A ne zistroin quet ahano
Heb digas d'am mab eur vestrez
Hag a vo deus o lignez
Mes dre c'hras Doue e meus cavet,
Ar vrec'h yaouanc a zo galvet.

10° Couplet

Rac se greomp eur banquet en quer,
Comsit pas tistroimp d'ar guer.
Abeurs Doue eo quement-ma
A respontat tud rebêka
Rac-se nellomp ket emelli,
Pa fell dezan couls a dezi.

11° Couplet

Ar mab Clizer a leverer,
Me renk goud penn an affer,
A quen en em lakat eus taol,
Me renk beza sur eus ma zaol.
Discoueset a'in, tud an ty-man,
Digasset d'in ar Marianna
Ma zaimp pelloc'h da eureuji
Daou dea pell-zo ho hirvoudi.

12° Couplet

Gortozit eun nebeudic,
Ma rin breman eur baleic
Pa housout a hen ro en ty
Eur plahic benac de zimezi
Saitu eur vauvesse aze,
Goelit a hi zo d'ho toaré.

13° Couplet

Ouz a vreg fur-ze pa zellan,
Ne quet hones a lavaran,
Hi deveus gred mad e labour,
Guisket he zud, maguet eur paour
Mes pa en deus gred pel-zo,
Eur allik hir grio

14° Couplet

Saitu amèn unan quer guae
Hag an heol bar en nuis mai
He diou chod zo diou oëren,
He daou lagat zo diou oëren,
Hag a zo da zioual dioute.
Hannes zur oc'h o hortoz.

15° Couplet

Ya ma mignon, ar plahic-se
 Eo ar chalme ho karante,
 Mes me gred eo dija poaset
 Ous an darbout e biziet,
 Ha merquet e voar e chod clei
 E zeus eun all neuz poquet deï.

16° Couplet

Nac an elik-ma da Doue,
 Hag o coulen hag en a ve
 Plahik yaouanc zavet ho penn,
 Da zellet deuz ar gristennien
 Ho lagat glas ho pleo melen
 Na ren quet mui drouz da zen.

17° Couplet

Gant an heol tom hag an amzer,
 E teu ar bleu barz er mesper
 Bloas zo an hini ha glascañ
 A voa glas dour evel homan,
 Hirie he distague euz ar brank
 Gant ar zin euz an den yaouanc.

18° Couplet

Ma mignon neuz den evidoc'h,
 Rac se greomp ar peoc'h,
 Chetu ar verne a houlenit,
 Hoguen den yaouanc dioualit
 Na ve biquen kerse ganti,
 Beza quitent demeuz he zi.

19° Couplet

Didosdet eta ma mignon,
 Eus a greis ho kalon,
 Da ziguemeret ho pried
 Ha dalc'hit mad dezi bepret
 Mar bezit fidel voar an douar,
 Er barados o pezo gloar.

GUILLERMIC.

(Propriété).

CHANSON AR FACTEUR

Var ton : *Ar Pillaouër.*

1

Me zo eun den anavczet
 Gant tout and dud er c'hontre (bis)
 Bembez ven gwelet e redeç
 Eus an eil ker diguile

REFRAIN

Me eo facteur ar c'harter ;
 Atao gant joa em gweler,
 Ganegn va baz, va zac'h ler,
 Me eo facteur ar c'harter

2

Bep mintin a zortian
 Evit monnet var ar mes (bis)
 Ganegn va zae'h, va baz penn cam
 Neur zrailla eun tam crampoës

3

Hirio meus cals a lizir u
 Da skigna evar ar vro (bis)
 Hag eun neubeudic journaliou
 Hastomp clask perc'hent dezo.

4

Da Kermorvan meus da vonet,
 Da Kerbloc'h, da Kerriou ; (bis)
 Ac'hano c'hign da Kerbiquet
 Da dy Jopic an Tachou.

5

Eun droïat vad a meus hirio ;
 An amzer n'en de ket fal (bis)
 Meur da vanac'h chist me lonko,
 Mes na vign ket mezo dal.

6

Plantomp eun droz zec'h er vaz
 E neur antreal en ker (bis)
 Eur lizer'vit Mari-Françoaz
 A zigant he servijer.

7

Coz hag yaouanc er vilajen,
 Pa ven gwelet e tonet, (bis)
 Tout int joyeüs, tout in laouen,
 Hepken ar c'hi zo fachtet.

8

Aoutrou facteur, à lavar Pôl
 Neur zisplega he journal, (bis)
 Azezet aze eus va zôl
 Bea meus eur banc'h chist fal.

9

Eur vam dener e teplori
 Ma zeo partiet he mab (bis)
 Mont ran buan d'he c'honjoli
 Evit-hi meus kelou mad.

10

Ar voerep Anna Tamouezer
 Neus bugale e Paris ; (bis)
 Me eo ar fidel messajer
 A rent dezi he monis.

11

Per Chupen zo e campagni
 Pel eus Breiz-Izel, var vor (bis)
 Hi vreg a vo joa vras enni
 P'am c'hlevo c'houlou digor.

12

Ar c'hommerçant, ar pinvidic,
An intanvez, an den clan (bis)
A guemer eun èr sederic
E n'ho zy pa antrean.

13

Ar facteur na nem emel ket
Eus strubuil ar politic (bis)
Tout an dud eo he vignognet :
Ezet, paour hag pinvidic.

14

E leac'h ma passean partout
E lakan contantamant (bis)
Mes evidon eo hir ar rout,
Va divisker ve contant.

15

Drei an erch e renkan pourmen
Drei ar gla. an avel cri, (bis)
Drei an domder, ar yenien,
Drei ar boultren, drei ar pri.

16

Var va c'heut lakan joyüstet
Drei neus fors pe seurt amzer (bis)
Me ive a joa ve karguet
Pa ve echu va dever.

17

Pa zevio fin ar bloavez
Sammet a almanagou, (bis)
Me er zistribuo var'mes
Neur ober va souhejou.

18

Dan deiz-se, tud madelezus,
Bezit sonj eus va foaniou (bis)
Roit egant ho torn gracios
Dar facteur ho teverou.

19

Sonjit mad pensos alies
Ar facteur neus bugale (bis)
Eur vreg triste drei he faourentes,
Paè bian da vaga ane.

20

Me, facteur, flabousser poullon,
Ato joyüs a varcho (bis)
Bemdez da zispén ma roujou
Ken a teuyo ar maro.

REFRAIN FINAL

Var an hent bras d'am attaqi ;
Digantan me c'houlénno
Eun heur c'hoas vit peur echui
Va zro. Neuze me varvo !



CHANSON NEVEZ

Eur Martolod yoanc trahisset gand e bried.

Voar un ton : *Joaüs.*

Silaouet oll bretoenet a houi glevo canna
Eur zon nevez composet er bloa-ma
Eur zon-man a so savet da eur vreg deuz ar vro
Na houlon quet chiffoqui den, na lavarín quet e hano.

Bet e voa bet an Illis dirag a sacramant
Ac e devoa prometet da eur martolod yaouanc
Prometet e noa dean dirac en aviel
Ma nije fidelite tre da betec mervel.

A heon ar memes tra dezi noa lavaret
Vit dizoudou-man Soasic paour pe quet a boan speret
Hes so un den a fesson, un den a galon vad
A demeus an dud respetet, eo e vam ac e dad.

Baoue an noad a bemzec bloas maon gant ar gouarnamant
O chervicha ar Republik gant eur galon gontant
E tesqui e vicher bars er musicanet
Eon so demeuz ar re guenta deuz ar vartolodet.

Dar huec'h bloas var ugent et vaon demeset
Ar pen pres ar memes oad et maon gant et bried
Sonjet et deus ober hoas eur honje
Evit caouet eur retrait a bevit heirus goude.

Eiz devez goude e eurret a ya de regiment
Et lezel et bried gant et sad ac et mam
Quen donet da bartial a lari dezi kenavo
Kenavo ta Françoisic a pedit Doue evidon.

Pedit Doue evidon ac an Itron Varia Arvor
Da ma dioual deus malheur quet a ma vign var vor
Pa vign-me var ar mor bras e danger ma bue
Houi a vo Soasic paour cousquet douc no quele.

Kers hardi ma fried, kers hardi dan arme
Kev me a mo son ahanoc'h lib heur a beb mome
Houi scrivo dign alies a me o responto
A me a lavaro dec'h ar nezventiou deuz ar vro.

Partial a ra neuze ar martolod yaouanc
Gant calz a joyusted a ya de vatiment
Monet a ra neuze da servicha ar republiq
Koulz a ya dan Tunisie evel ma ya dan Afriq.

Koulz a ya dan Tunisie evel ma ya dan Afriq
Evit gonet arhant da sigaz da Soazie
Gueq lur a tri ugent ar mis dezi a sigasset
Seveni ra et condition evel mar deuz laret.

Mes promessayou Soasic na negn quiet bet loyal
Ancouet neuz et fried a cavet re-all
A pehet a outriag siouas neuz cometet
Pehini ar roue Salomon nan defe bet scrivet.

Pehini ar roue Salomon, dignes na defe laret
Dre ar pehet a outriag mar dor ar garante
Collet neus ar vertus deux ar fidelite
Pehini na dleait quinn nemet da zaou bried

Pa neuz collet e honor neuze voa glaharet
Neuze sonjait Soasic penos ne devoa eur pried
Kuitad a ra e her et heren ac e bro
A vit monet eur pennad da basseal et zro.

Ac e zud abars er guer gati so glaharet
Klasquet et voa Soasic daouste a pelec'h et zeï ed
Scrivet an deuz da partoute, partoute ar herie bras
A neblech na glevez quiet quelou demeuz Françoisise

Scrivet neuz da partout, partout en hospitaliou
An neblech na glever quiet nan demeuze helou
Ac et zud abars er guer so en desolation
Ac et zad a zo maro siouas gant rann galon.

Laret ra de mignoned dar hartel tro var dro
Ma merc'h zo nem berisset hounez a zo maro
Voai quiet eit mez ar vro mez da barrez Melven
Ac evit espern et arham hi glasq a aluzen.

Ar spaç deuz a tri mis ei bet e parrez Melven
Heno et voa bet Soazie paour et ober pinigen
Partout dre lerc'h ma ya a ra et declaration
Lar et voa itanvez a losquet en abandon.

Mes bars e parrez Melven zo tud a volonteiz vad
A recommandez desi monet dan hospital
Mes Soasic a sonja ia dre e santiman
Ma yaman dan hospital me renquo roi arhant.

Ben a vezo goed penoz a mo danvet
Certain an hospital e renquo be payet
O guelloc'h et zeogane chom et renq ar beoyen
Abisset me me hoas calz traou en aluzen.

Ar henta moa bet an honor da velet ar fleuren
E voa dar sul ar sacramant et illis bourg Melven
Heno me e guelas ac hi goal contristet
Ar vav e fen un tentaman ober caon de fried.

Ar vav e fen un tentaman ober caon de fried
A bed all dre ar hras Doue maon hoas e bue
Ben ar fin e voa clewet pelec'h et voa Soazie
Neuze voa quelet dar guer neuze soudenniq.

Neuze noa quelet dar guer casset da di e mam
A ben teer zinn goude ma voa bet chenchaman
Pa voa scrivet de goas a casset dean ar helou
Voa bet un vehic vian a laquet en ne hano.

Pa noa lennet e liser heon a voa soueset
Penzec mis zo a zo breman neusem quiet nem velet
Nemet lezel a traou bars no fausation
Ma goad a zo selaset a poaniet va halon.

A hoas nallon quiet partagi gant va hamaradet
Goap a raffin ahanon mar zeuffen da glevet
Me a zo eur martolod yaouanc et vev var ar mor
Ac a meus kavet Yann Chupenn da ober dign ma labour.

Mes gant a traou se tout me zo consolet
Agisse me a mo bugale da heritou ma danvet
Neuse deffet scrivet de vam a de dad
Houi a peuz roid dign eur liser ac ra dign calonnad.

Mar carse Françoisic be sentet deuz ma avisou
He visait bet a heirussa demeuz o grages ar vro
Bet e dijait eur menaj er guer en Orient
Ac liberte da vale Soasic pas dije hoant.

Ben nije sonjait mont de bro da vale
Gant a train Soasic vije bet conduit
Breman Soasic paour houï a zo goall dappet
Brema renqet chom er guer da usquellat

Me o ped potred yaouanc pere nign quiet demezet
Da ober itention bars mont da choas merhet
Car me moa choaset unan a voa da ma bolonte
A gouscoude siouas dign gati ma zo tapet.

Ar zon man a zo savet gant eur nezere glan
Evit caouet ber a namser pa ve outi et hunan
Mar fot dorc'h gout a clewet piou a deuz e savet
Eo Marie Anna Héméry demeuz a Plonevez.

FIN

